

AVAL HON LENNEGEZH O C'HWEZHAÑ (50)

Barzh ar gizidigezh. Barzh ar weledigezh. Barzhonegoù hir, barzhonegoù berr. Barzhonegoù klotennaouet, barzhoneg komz-plaen. Met, barzhonegoù bep tro paket, kizellet, roet evel melezour un ene, roet evel un ti d'e drivliadennoù. Ar varzhoniezh oa e rouantelezh. Evel-se e oa Maodez Glanndour. Evel-se e oa person kozh Louaneg. Den meur a fez a oa eus hon Maodez : fez kristen, evel just, met ivez fez el lennegezh, el lennegezh vrezhoneg. Evitañ e oa pontoù etre an daou, sur. Met unan n'en deus ket ar memes fez kristen a c'hall tañva al lusk hag an nerzh diskuliet gant hon Maodez. Ur gwir varc'hekadenn ouzh klask tizhout ster ar gerioù ha heklevioù livet ha sonet ar skeudennoù. Ober a ra hon Maodez gant ur yezh wirion, hini e selloù, e gleved o lakaat e drivliadoù en skrin e soñjoù ha moarvat e vennozhioù. Lod a lâro ne oa ket ur filozofour, marteze e oa, marteze ne oa ket, ne vern. Ur prederour e oa avat. Prederiet gant kened ar pezh a oa en-dro dezhañ, tud, loened, boudoù bev a-bep seurt, ar mor, an avel, en mesk e drubuilhoù den. Evel *ar voc'hig-ruz*, gward hon liorzhoù kuzh, gward degemer hon c'hêr, eiler ar vran en penn all al liorz, gward du hon memor kollet en deroù an amzerioù :

« Ar voc'hig-ruz a vesk he geiz
Gant frondoù blim ar bleunioù gwenn,
Ar bleunioù gwenn war brankoù du
Ur spernenn irin.

Er feunteun skeltr eo boull an dour.
Evel biskoazh eo boull an dour
War an diribin.

Evel ur bugel'lamme ar wazh,
Ha kan an evn a ruilh a builh
Gant ur joa pitilh. »

Gant ar joa da vezañ bev, eme hon Youenn. Dres eo se. Bomoù prim, fresk ha frealzus, pell diouzh tousmac'h ha turmud ar bed. Un tamm preder war ar pezh omp, war ar pezh hon eus ha war ar pezh a rankomp miret ha difenn. Añjela Duval, hon Añjela, n'emañ ket pell, kennebeut. Ekologiezh hon lennegezh maget gant eeunded plijadurioù eeun ar vuhez, e-maez an amzer. Pe c'hoazh *kazhig gwenn* mestr ar paterad :

« Delioù rous an diskaramzer
A droidell war an avel.
Hag a ve dit ur c'hoariell
Kazhig bihan gwisket en gwenn
A lamm warno a bav digor ? »

N'em eus ket soñj piv a lâre, n'eus ket a varzh mat nemet sot gant ar c'hizhier e ve... Met soñjit en kizhier Montaigne a lâre : « ar c'hazh zo un den evel un all » ! Sellit'ta troidigezh ar barzhoneg heniwerzhoneg dalc'het en un dornskrid zo en Alamagn herie. Skrivet eo bet gant ur manac'h eus an IX^{vet} kantved. Komz a ra diwar-benn e gazh, *Pangur Bán* (Pangur Gwenn), hag ivez eus e labour manac'h a oa adkopiañ skridoù a-bep seurt, hag ober glosoù da zispiegañ geriennoù zo :

- « 1. Me ha Pangur Gwenn – pep hini ac'hanomp gouestlet d'e arz dezhañ
emañ e spered gant ar chaseal – ma spered gant ma c'hefridi-me.
2. Karet a ran menel – gwell evit nep gloar – dirak ma levrig gant aket ar ouiziegezh
n'eus tamm gwarizi ouzhin a-berzh Pangur Gwenn : karet a ra e-unan e arz bugel.
3. Pan vezomp – kontadenn hep anoazh – en hon ti, hon daou hon-unan,
bezañ hon eus – kurioù sport diharz – un dra bennak da bleal hon lemmded gantañ.

4. Ingal e c'hoarvez kurioù a dalvoudegezh – ul logodenn tapet en e roued,
hag evidon e kouezh em roued ul lavar diaes gant ur c'hompren start.
5. E lagad, gant ur sell pizh, buket war ar voger-dro :
ma-unan a-enep lemmded ar skiant e vukan ma lagad sklaer, a pa vefe gwan-tre.
6. Laouen eo o vont prim pan gouezh ul logodenn dindan e skilf lemm :
Me ivez zo laouen pan diskoulman un diaez a gudenn gerioù.
7. Dimp da vezañ evel-se a-hed ar wezh, n'eus hini hon daou o tiaezañ egile :
pep hini hon daou a gar e arz, a oar kaout dudi e-unan.
8. Eñ e-unan zo mestr al labour a gas bemdez :
pan vezan gant ma labour-me, e kasan diaezamant lec'h m'eo anat an traoù. »

Vignetenoù buhez, skeudennoù war an tomm, troc'hadenoù en ul linenn kalz hiroc'h, ur paouez rediet hag ur *focus* war darvoudoù ordinal, ambrouget gant ur c'hazh bihan eus 1900 bloaz zo pe gant unan all eus 50 bloaz zo, ur bisig, ur piloù - evel ma lârer war arvor Treger. Skeudennoù war dec'h, evel ma skrive c'hoazh hon Maodez :

« Edon o vale war an hent
Pa dremenas hebiou din o redek
Ur plac'hig vihan.
Ken souezhus en he dremm
He daoulagad alamandez-heñvel.
Ha mibin e pignas gant ar c'hrav
Ma kleven o pellaat strap-distrap he botoù.
Ha ga,t un hej a goulzadoù
E tistaole war he choung
He blevad hir ha gwagennek,
An ebeulez. »

Skeudenn war dec'h o verkañ un deneridigezh a oa dezhañ, ha dezhañ hepken... met rannet ganimp, ha ganimp hepken. Ur mousc'hoarzh skedus d'ar vuhez, ur mousc'hoarzh sellant d'ar garantez. Ha dreist pep tra eo gouest ar barzh d'hon lakaat eno oc'h arvestiñ ouzh ar pezh a deu dindan e bluenn. Barzhoniezh eeun, ur varzhoniezh n'he deus ket ezhomm a hentoù troidellus na skoasellek evit tizhout hon c'hreiz, evit hon fakañ hag evit hon frealziñ. Ezhomm hon eus eus ar varzhoniezh hag eus ar varzhed. Un ezhomm a oa bet komprenet gant hon Maodez, gant hon Roparz, gant strollad *Gwalarn*. Gante e oa bet lakaet ar varzhoniezh en penn-araog al lennegezh.

Herve Bihan

Levrlennadur

Maodez Glanndour, *Gant hentoù meur ar gwerzaouañ*, Sav, Niv. 18, Diskaramzer 1940 / Goañv 1941, pp. 31-45.

Maodez Glanndour, *Gant hentoù meur ar gwerzaouiñ*, Dre Inizi ar Bed Kletiek, Al Liamm, 1991, pp. 131-148.

Maodez Glanndour, *Komzoù Bev*, Al Liamm, 1985.

Maodez Glanndour, *Barzhonegoù*, Gwalarn, Niv. 135, Ebrel 1941, pp. 291-294.